



Kemennadenn d'ar Mediaoù / Communiqué de Presse

CONVENTION ÉTAT-RÉGION LANGUE BRETONNE : APPEL A RASSEMBLEMENT DEVANT LE RECTORAT DE RENNES MERCREDI 19 JANVIER A 14 H 30

Nos différents réseaux d'associations (**Diwan**, **Div Yezh Breizh** : association régionale des parents d'élèves pour l'enseignement du/en breton à l'école publique, **Divaskell Breizh** : réseau des associations Dihun des parents d'élèves de l'enseignement bilingue catholique, **KeleNNOMP !** : association des enseignants en langue bretonne, **Kevre Breizh** : Coordination culturelle associative de Bretagne) **appellent à venir se rassembler devant le rectorat de l'académie de Rennes, mercredi 19 janvier à 14 H 30.**

Après la manifestation, qui avait eu lieu le 13 mars 2021 à Quimper réunissant près de 5 000 personnes dans les rues de Quimper, demandant que soit signée une convention ambitieuse avec l'État face aux blocages du Ministère de l'Éducation Nationale, nos réseaux restent pleinement mobilisés.

Nous avons, lors d'une conférence de presse commune le 5 janvier dernier à Quimper, exprimé notre colère face aux dernières propositions du rectorat, faites juste avant Noël, et qui étaient pour nous inacceptables en l'état.

Depuis, les lignes semblent bouger, plusieurs rencontres ont eu lieu entre le rectorat et les services de la région dont une entre le Président de Région et le Recteur de l'Académie de Rennes sur ce sujet.

Mais il nous faut rester mobilisés pour que les demandes des bretonnes et des bretons qui s'étaient exprimés en force lors de la manifestation de Guingamp le 29 mai dernier (suite à la censure partielle de la loi Molac par le conseil constitutionnel) soient enfin entendues par le pouvoir central et notamment l'Éducation Nationale. Nous attendons en outre du Recteur des réponses concrètes à nos demandes lors du prochain Conseil Académique des Langues régionales de l'académie, qui aura lieu en visioconférence le 18 janvier, la veille de ce rassemblement.

L'approche des élections présidentielles risque de bloquer encore une fois les négociations si elles n'aboutissent pas rapidement. Il reste environ 15 jours pour parvenir à un texte ambitieux sur la base des propositions de la région, qui puisse être voté lors de la prochaine session de février du conseil Régional de Bretagne.



Kemennadenn d'ar Mediaoù

KENEMGLEV STAD-RANNVRO BREZHONEG :

Galv d'en em vodañ dirak rektordi Roazhon d'ar Merc'her 19 a viz Genver da 2e30

Ar rouedadoù kevredigezhioù (**Diwan, Divyez Breizh** : Kevredigezh rannvro tud ar skolidi evit ar c'helenn ar/e brezhoneg er skolioù publik, **Divaskell Breizh** : rouedad ar c'hevredigezhioù Dihun tud ar skolidi er skolioù divyezhek katolik, **Kelennomp !** : kevredigezh ar gelennerien e brezhoneg, **Kevre Breizh** : kenurzh sevenadurel kevredigezhel e Breizh) **a c'halv d'en em vodañ dirak rektordi akademiezh Roazhon d'ar Merc'her 19 a viz Genver da 2e30.**

Chom a ra war evezh penn-da-benn ar rouedadoù goude ar vanifestadeg e Kemper d'an 13 a viz Meurzh 2021 ma oa bet bodet war-dro 5 000 den o c'houlenn ma vefe sinet ur c'henemglev uhelek gant ar stad abalamour da skoilhoù Ministrerezh an Deskadurezh Stad.

Da-geñver un emvod kehentiñ d'ar 5 a viz Genver e Kemper e oamp aet drouk ennomp ouzh kinnigoù diwezhañ ar rektordi a-raok Nedeleg ha na c'heller ket degemer anezho.

Cheñch a rafe penn d'ar vazh abaoe, diouzh a glever. Un toullad emgavioù zo bet etre ar rektordi ha servijoù ar rannvro, unan en o zouez etre Prezidant ar Rannvro ha Rektor Akademiezh Roazhon diwar-benn an dra-se.

Ret eo deomp chom war evezh evit ma vo klevet gant ar galloud kreiz ha dreist-holl gant an Deskadurezh Stad goulennoù ar bretoned hag ar vretoned o doa diskouezet o nerzh e-pad ar vanifestadeg e Gwengamp d'an 29 a viz Mae tremenet (goude disfiz darnel al lezenn Molac gant ar c'huzul vonreizh). Ouzhpenn-se e c'hortozomp respontoù fetis d'hor goulennoù gant ar Rektor da goulz Kuzul Akademiezh ar Yezhoù Rannvro kentañ a vo dre videoprezegenn d'an 18 a viz Genver, da lavaret eo an deiz kent an tolpadeg.

Gant dilennadeg ar prezidant o tostaat ez eus ur riskl ma vefe stanket ur wech ouzhpenn ar c'hevraouiñ ma ne zeuont ket da vat dizale. Chom a ra war-dro ur pemzektez evit dont a-benn da gaout un destenn uhelek war an diazezoù savet gant ar rannvro evit ma vo votet da geñver emgav kentañ kuzul Rannvro Breizh e miz C'hwevrer.